

Bre-mañ bloaz da Zan-tez Ka-tell,  
0 — 0 — 0 — Zor-ti-as ar  
flod eus a Vour-del, Zor-ti-as ar flod euz a Vour-del.  
0 — 0 — 0 — 0 — 0 — 0 — 0 —

Bremañ bloaz, da Zantez Katell,  
Zortias ar flod euz a Vourdel. (2w)

Pa oent erru e-tal Penmarh  
O-devoe kavet avel awalh (2w)

Petra c'hoarvez gand Penmarhiz  
O terhel goulou-noz 'n o iliz ?

Kriz a galon neb na ouelje,  
E-tal Penmarh neb a vije,

O wel'd ar mor braz o ruziañ  
Gand gwad ar gristenien ennañ !

Neb a welje merhed Gwaien  
O vond d'an aot beb a-unan

Seiz intañvez ha seiz ugent  
O vond d'an aot en eur vandenn.

O houl an eil digand eben :  
— N'az-peus ket klevet kelou va den ?

— Kelou ho ten ha va hini :  
E-tal Penmarh 'maint o veuzi !

Malloz ! malloz da Benmarhiz  
A zalh goulou-noz en o iliz.

'Zalh goulou noz 'n o ilizou  
'Vid ma yel d'an aot 'r batimañchou

*Liestoniet gand Jef AR PENVEN  
(« Kanom laouen », Ar Falz).*